



12

AN NIVERENN 800 DIJA

E 2005 e voe roet lañs da Ya!
800 niverenn goude e talc'her gant ar gazetenn baper nemeti
moulet en ur yezh rannvroel e Bro-C'hall a-bezh

RANNET EO AN DUD



Kaoz azogant Amazone en em staliañ e Breizh. Ha rannet an dud etre surentez, prizioù izel, marc'hadourezh liesseurt kaset betek ar gêr hag an distruj a vo graet e-touez kenwerzhourien o terc'hel plas e kêr.

3

ADSEVEL AR GOUEZELEG

Emañ ar votadegoù e Bro-Skos o tont. Hag ac'hann da viz Mae 2021 e klasko difennourion ar gouezeleg ober trouz ha lakaat pouez àr an SNP evit cheñch penn d'ar vazh.

2

ANARKOURIEZH

Pedet eo bet Isabelle Attard e ti-Dialogues Brest evit eskemm diwar-benn he levr "Comment je suis devenue anarchiste".

3

RENABLIÑ LABOUSED

E miz Genver 2019 e emezelle Maryvonne Cotten en LPO. Buan-tre goude e voe roet lañs d'ur strollad arbennik, gouestlet d'ar gwennili ha d'ar glaouered.

11

Keveler an holl draoù a liamm ac'hanomp!

Kengredit Breizh

Crédit Mutuel Arkéa, S.A. coopérative de crédit à capital variable et de courtage d'assurances. Siège social : 1 rue Louis Lichou, 29480 Le Relecq-Kerhuon. Siren 775 577 018 RCS Brest, Orias 07 025 585. 01/2020.

kerné

SISTR CHUG AVALOÙ

GWERZH DRE AR MUNUD WAR AL LECH
TARVA DIGOUST
PRODUOÙ A BEP SEURT DEUS AR VRO

DIGOR A-HED AR BLOAZ EUS AL LUN D'AR SADORN
EUS 9H30 DA 12H30 HAG EUS 2E DA 7E

Re a alioù a noz d'ar yec'hed. Evit gant muiad.

Mesmeur - 29710 POULDREUZIG - 02 98 54 41 86
www.cidre-kerne.bzh - f @ Cidre Kerné

Bro-Skos

ADSEVEL AR GOUEZELEG

Emañ ar votadegoù o tont e Bro-Skos. Hag ac'hann da viz Mae 2021 e klasko difennourion ar gouezeleg ober trouz ha lakaat pouez àr an SNP evit cheñch penn d'ar vazh. Embannet zo bet gant Misneachd ur manifest a 60 pajennad ma vez lakaet sklaer ennañ eo ret cheñch ar politikerezh ha gwelet an traoù evel m'emañ, en inizi, evit ma vehe savetaet ar gouezeleg. E-kreiz ar preder emañ dalc'h an lojeiz hag ar saozneg er skolioù.



Ur strollad a stourm evit gouezeleg Bro-Skos eo Misneachd* (fizians). Bez' emañ o paouez lakaat embann ur manifest evit saveteiñ ar yezh e Bro-Skos ha dreist-holl e gouezelegva gwalarn ar vro. Ha ne ya ket dizamant gantañ !

Skolioù disaozonekaet

Goulenn a ra Misneachd e vehe evezhiet strizh

marc'had an tier-hañv hag ar feurmiñ mod RBnB, dreist-holl e inizi ar gwalarn, kuit ma vehe "diskosaet" an inizi a 'z afe e-kerz Saozon ha saoznegourion pinvidik. Goulenn a ra ivez e vehe savet forzh lojeiz sokial evit tud bet ganet ha maget en inizi kuit ma tivroahe ar gouezelegourion a-vihanik er c'hêrioù bras. Reklem a ra ivez e vehe lakaet e pleustr ur politikerezh

evit miriñ implijoù d'ar gouezelegourion en inizi. Ha dreist-holl e kinnig Misneachd, krenn-ha-krak, e vehe lakaet holl skolioù an Hebridez da vout skolioù dre soubidigezh ha lamet ar c'hentelioù saozneg enne ! Ha dre ma n'eus ket trawalc'h a ouezeleg e skolioù-meur ar vro e kinnig ar strollad e vehe profet d'an holl studierion ur bloavezh a studiiñ dre soubidigezh.

Skouer ar Plaid Cymru

Padal e vez lakaet ar pouez àr ar gouezeleg gant ar gouarnamant emren c'hoazh. Met hervez Misneachd eo "didalvoud da vat" ar pezh a vez lakaet e pleustr hiriv an deiz. Hag ar strollad da addegas dasoñjar studiadenn bet graet gant kelenourion skol-veur an Highlands hag an inizi, a ziskouez sklaer emañ ar yezh o vont da get er gouezelegva. "Poent eo cheñch penn d'ar vazh" a lavar Misneachd. Hag ar strollad da c'houlenn gant an SNP e vehe kemeret skouer àr ar pezh a vez reklemet gant ar Plaid Cymru e Bro-Gembre (ha n'eo ket e penn ar vro avat).

An SNP mestr àr ar politikerezh yezh

N'eo ket dre zegouezh e klask Misneachd ober trouz er mare-mañ hag heurtiñ ar gouarnamant SNP kar votet e vo evit ar breujoù emren

e miz Mae 2021. Hervez ar sondadegoù diwezhañ emañ an SNP en e uhelañ, ar pezh a dalvez eo etre daouarn ar strollad dizalc'hour emañ amzer da zont ar gouezeleg ha n'eo ket etre daouarn an dTravaillisted peotramant an Tories.

Hervez ar studiadenn àr implij ar gouezeleg, bet graet gant kelenourion skol-veur an Highlands hag an Hebridez, n'eus ken 'met 4% ag ar vugale oc'h arruout er magourioù en Hebridez hag a ouia gouezeleg. Evit ar grennarded eo heñvel. War ar 20% a zo anezho 7% anezhe a gomz gouezeleg d'o zud ha n'eus ken 'met 1,3% a ra gant ar yezh gant o mignoned. Daoust da se e kendalc'h ar gouarnamant emren da lavarout e ya àr-gresk niver a ouezelegourion.

Tud a ouia un tamm yezh marteze met n'eo ket tud a ra gant ar yezh e gwirionez.

Fabien Lécuyer

* misneachd.scot

Bro-Sina

NÜSHU, YEZH KUZH AR MERC'HED

E kanton Jiangyong, e gevred Bro-Sina e vez outi. Gwechall e veze implijet gant ar merc'hed evit kontiñ o buhez pemdeziek d'o c'henseurtezed. Hiriv emañ oc'h adveviñ a-drugarez d'ur skiantour ha d'ur strollad merc'hed ag ur gêriadenn vihan.

80% ag ar vro a zo goloet gant menezioù ha flondrennoù don. En ur flondrenn ag ar vro-se eh eus bet ganet ur yezh ha n'eus ket he far er bed : an Nüshu, da lavaret eo "skritur ar merc'hed". Hervez lod e vehe bet forchet 3000 bloaz zo, peotramant, hervez lod-all, e-kerzh renad ar Song (960-1279). Met en XIX^{vet} kantved eo, dreist-holl, m'en en ledas er proviñs e-touesk merc'hed ar pobloù Han, Yao ha Miao. D'ar mare-se ne ouie merc'hed kontelezh Jiangyong na lenn na skriviñ hag evit deskiñ an Nüshu e veze adkopiet testennoù skrivet er yezh-se.

Gwechall e veze komzet an Nüshu e pevar c'hanton hag en 18 kêriadenn dostañ a bPuwei. Met er bloavezhioù 80 e oa bet kavet teir maouez a ouie c'hoazh ar yezh e kêriadenn Puwei. Se zo kaoz



e oa daet Puwei da vout kreizig-kreiz ar sevenadur Nüshu hiriv an deiz.

Ur meskaj a beder yezh

Ne oa ket an Nüshu ur yezh komzet e gwirionez, met kentoc'h ur yezh skrivet. Evit he skriviñ e oa bet forchet ur skritur a denn da skritur ideogramek ar sinaeg met gant sinoù hiraet ha moanaet. Ur meskaj a 4 yezh pe rannyezh a "xian" (kanton) Jiangyong eo. Ken bras ha bro An Oriant eo ar Jiangyong ha meur a rannyezh a vez komzet ennañ.

Yezh aferioù an eured

Gwechall e veze graet gant an Nüshu evit brodiñ frazennoù

àr ar mouchoueroù, an avelourion, an dilhad. Kannenoù ha barzhonegoù a veze komzet e Nüshu ivez. Gant an Nüshu e konte ar merc'hed o foanioù, o mizer met evit o eurusted ha servij a rae d'ar re gozh da zisplegiñ d'ar merc'hed yaouank penaos bout priedoù mat, chom gwerc'h, kaout doujañs ouzh Doue. Peurvuian e veze kaoz ag aferioù an eured e Nüshu.

Ar merc'hed a rae gant an Nüshu a veze tolpet e strolladoù anvet "ar c'hoarezed touer". Teir pe peder merc'h a skrive kemennadennoù e Nüshu pe a eskemme barzhonegoù skrivet er yezh-se, kuit da vout komprenet gant ar baotred

Ur skol evit deskiñ an Nüshu

E 2000 e lakaas merc'hed a Puwei en o fenn adsevel an Nüshu ha digeriñ ur skol hag ur mirdi evit he deskiñ. Chom a ra seizh merc'h hag o deus desket lenn ha skriviñ ar yezh gant merc'hed koshoc'h bet desket gante an Nüshu àr barlenn o mamm.

Abostol an Nüshu

Iskisat tra : gant ur gwaz ha n'eo ket gant ur vaouez eo bet studiet hag adlañset an Nüshu e gwirionez, Zhou Shuoyi e anv. Er bloavezhioù 1950 e reas anaoudegezh gant ar yezh kar e voereb a oa dimezet gant un den a-orin a Jiangyong. Met e 1954 e tarzhas ar Reveulzi Sevenadurel lañset gant Mao hag e Warded Ruz. Kement tra a denne d'ar bed kozh a veze tonket da vout kaset er blotoù d'ar mare-se. Devet e oa bet e holl zosieroù ha kaset Zhou Shuoyi d'ar Laogai, goulag Bro-Sina. 21 bloaz e chomas eno !

Ur wech dibrizonet e kendalc'has gant e studioù avat hag e 2003 e voe embannet e c'heriadur Nüshu-Sinaeg, an hini kentañ eus ar seurt-se, evel-just !

Fabien Lécuyer



Berr-ha-berr

Kenderc'hel,
daoust da bep tra...

Sant Herbot : dañsal, goude 6 miz ehan !

Dañsal pe chom hep ober ? Kanañ pe devel ? Lakaat un tamm jel war an daouarn ha respont d'ar re a gan gant ur maskl ? Setu aze ar pezh a zo bet graet disul goude merenn ha da noz gant skipailh gouel an amann 'ba' sant Herbot, trugarez dezho !

Priz ar Vugale ha Priz ar Yaouankiz : 10 levr nevez

evit gouel al levrioù Karaez. Pierre-Emmanuel Marais, Kristian ar Braz, Muriel ar Morvan, Yann-Fañch Jacq... evit Priz ar Vugale. Sarah Chedifer, RJ Kernoa, Loeiza an Duigou evit ar re 6vet/5vet, hag evit ar re Bevar/Lise, Gege Gwenn, Jakez-Erwan Mouton ha Paol ar Meur. Peder skrivagnerez, c'hwec'h skrivagner, trugarez dezho da gas ar re yaouank e bed ar faltazi e brezhoneg !

Haiku : 366 haiku, ugent vloavezh a varzhoniezh.

Deuit da gerc'hat anezhañ e gouel al levrioù, maketennet gant Olwen Manac'h, gant un 300 bennak a haikerezh ha haikerien, postskridoù skrivet gant haikerien brudet, ha fotoioù evit diskouez pegen bev-buhezek eo ar c'honour-mañ.

Frañs 3 : Bali Breizh 'ba' Kemperle e miz Here

Ha deus Petra vo kaoz ? Deus festival Taol Kurun (a vo pe ne vo ket) ? Deus Jean-Bernard, deus ar Pikez blev ruz, deus kêr-Gemperle etre ar stêrioù Isol hag Ele, deus an dour-beuz...

Kenfinet, klozet... ?

Hapenaos elavarit "clusters", "mesures barrière" ? Ret e vo o implij muioc'h-mui e Breizh, gant ar glav hag ar yenijenn.. Chomit e-tal an tan, e korn an oaled !

FC

Digreizennañ servijoù Bercy

War ar 6000 den o labourat eno e vefe kaset 3000 war-zu ar rannvroioù, adalek 2022. E Gwengamp e vefe staliet etre 25 ha 30 post, e Montroulez etre 35 ha 40 ha kement all e Redon. Ne vefe netra er Mor-Bihan. El Liger Atlantel, e Kastellbriand, e vefe staliet war-dro 20 post adalek 2021.

800 !

Padet hon eus pell, a-drugarez deoc'h holl. Ha posupl e vo deomp derc'hel betek an niverenn 1000 ?

N'eus netra sur rak n'eo ket niverus an dud a ra war-dro ar gazetenn, kement evit skrivañ, evit koumanantiñ, evit brudañ. Hag un taol-kaer eo pep niverenn.

Evit skrivañ

Dre chañs omp gouest da gontañ war kenlabour reoliek Fabien Lecuyer, Pierre le Boulout, Jean-Michel Sanner. Aliesoc'h-aliesañ e vez pennadoù gant Marsel Modir. Dav deomp menegiñ kenlabour reoliek Fanny Chauffin, Dewi Siberil, Jil Kilivere, Yann Chauvel, Jean-François Peden, Goulc'han



Kervella, Patrice Dreano, Régis Auffray, Job an Irien, Paol Mingant, Gege Gwenn, Drig ha Joseph Tanguy. Ha tout ar re a skriv ur wech an amzer evel Françoise Le Barazer, Bernez Gery...

Met n'eo ket trawalc'h, c'hoazh. Bep bloaz e vez stummet yaouankizoù a oar skrivañ e brezhoneg. Ingal

e tremen traoù dedennus nepell eus o zi, eus hon ti. A-bouez eo kaout pluennoù nevez, na pa vefe evit aozañ an dazont.

Evit koumanantiñ

Abae bloavezhioù emamp gant 1200 koumananter. N'eo ket fall, a lâro lod. N'eo ket trawalc'h evit padout, a

GWERZHAÑ A-BELL

Diaes d'an dud bezañ a-du war raktres Amazone, evel ma vez kinniget da dud Bro-Gerne.

D'ar 26 a viz Even, daou zevezh a-raok an eil tro, e sine Ludovic Jolivet, e anv QBO, ur rak-werzh evit 62 632 m², e Lumunoc'h, e Brieg, evit ur priz a 1,25 milion €, da lâret eo 20€ ar m². Buan-tre e voe komprenet e oa soñj Amazone staliañ aze, nepell eus an hent-tizh — klevet a reer ar c'hirri o tremen, ken tost ma vezer — he stal nemeti evit Breizh a-bezh. N'eo ket Ludovic Jolivet a zo bet dilennet da vaer

met Isabelle Assih, direnket gant ment an dachenn, oc'h embann e heuilhfe ali ar brasañ niver.

Krennet ar gorread

D'ar yaou 24/9 er Pavillon e Kemper e oa bodet neuze dilennidi ar c'humunioù a ya d'ober QBO. War ar 56 mouezh e voe kontet 30 a-du gant ar raktres, 21 a-enep, 4 gwenn hag unan nul. Degemeret eo bet neuze met krennet eo bet ar gorread. Ne vo nemet 12 00 m² en holl. Prometet en deus Amazon e vo tutaet 80 post CDI ha 10 ouzhpenn evit ar surentez,

kresket c'hoazh war an 250 post darnamzer a vo krouet gant an dreuzdougerien. Raktreset zo bet labourioù evit 17 milion a euroioù. Chom a ra gant ti-kêr Brieg da asantiñ d'ar raktres sevel. Gounit a raio hemañ ur bern arc'hantafer — war-dro 100 000€ taos deskarderezh, 230 000 € taos war an douaroù, ha kement all e anv an taos a



lâro lod all. Rak uhel e chom frejoù ar post dre ma n'eo ket stank ar skignañ. Rak ne c'hellomp ket goprañ — ha pa vefe nebeut — an dud a labour ha rankout a reomp ober — kalz re — gant tud a-youl-vat. Kreskiñ an niver a dud koumanantet a zegasfe aezamantoù arc'hant ha neuze gwellaat ar gazetenn hag asuriñ an dazont.

Evit brudañ

Koulskoude... An holl ac'hanomp a anavez mignoned, keneiled... dedennet gant ar yezh. Deomp-ni da vroudañ anezho da vestroniañ gwelloc'h ar yezh, da lenn, da goumanantiñ. Deomp-ni eo da gaout al lennerien nevez-se.

ranko paeañ an embregerezh — met asuret en deus ar maer, Thomas Ferec, e vo implijet an arc'hant evit mont war-zu ar c'henwerzh lec'hel. A-enep e sav un tamm mat a dud — d'ar sadorn 26/9 e oa ur 80 manifestour bennak war an dachenn — rak ma vez krouet postoù-labour e Brieg hag e tro-dro zo riskloù ivez e vefe lakaet diaes ar c'henwerzh, e Kemper hag e lec'h all.

Hervez un enklask goulennet gant Mounir Mahjoubi, bet sekretour-stad evit an niverel, e vefe distrujet ouzhpenn 2 bost e Bro-C'hall pa vez krouet unan gant Amazone.

KAOZ A ANARKOURIEZH E BREST

D'ar yaou 24 a viz Gwengolo e oa bet pedet Isabelle Attard e ti-Dialogues Brest evit eskemm diwar-benn he levr "Comment je suis devenue anarchiste", bet embannet warlene e ti-embann Le Seuil.

Un tregont bennak a dud a oa ersal-kafe bihan. Dagentañ eo bet disklêriet un tamm buhez ar skrivagnerez. Studioù hir he deus graet e skolioù-meur Bourdel, Orléans, Paris hag Umea (Bro-Sued, e-lec'h ma oa bet o vevañ e-pad 7 vloaz), tapet ganti meur a ziplom war an Arkeologiezh. E 2005 e oa fiziet enni karg renerez Mirdi Bayeux. E 2010 ez eas da ezel ar CNRS goude un doktorelezh Arkeozologiezh, hag anvet e voe da renerez Mirdi dilestradeg Utah Beach e Normandi. He fost diwezhañ a zo c'hoazh en ur mirdi : hini ar skol e Bothoa

(22). E bed ar politikerezh he deus graet un dro : ezel ar re c'hlas e 2001, goudel ezel EELV, ha dilennet da Gembr an Deputeed e 2012. Ober a ra war-dro "Sevenadur ha Deskadurezh" (sekretourez ar strollad kannaded eo). E-touez ar c'hwec'h nemeto a oa a-enep an "état d'urgence" a weler anezhi, hag e-touez an 2 nemeto a-enep e vefe kendalc'het kas kirri-nij an arme gall e Bro-Siria. E 2013 e tilezas EELV e 2013 evit ur strollad politikel nevez krouet, Nouvelle Donne e anv, ha trec'het eo bet e dilennadegoù 2017.

Anarkouriezh

"Penaos on deuet da vezañ anarkourez" a zo titl he levr, c'hoant ganti diskleriañ perak n'he deus ket fiziañ ken er demokratelezh, mod ofisiel. Da gentañ tout e wel

liammoù kreñv etre 3 zra : an ekologiezh, ar feminism, an anarkiezh, pileroù ar gevredigezh. Er bed a-vremañ e weler feulster e-leizh a-enep an natur (loened, douar, plant...) An ekologiezh a glask kaout muioc'h a zoujañs evit ar blanedenn hag ar pezh a vev enni. Evit Isabelle Attard n'eus ket da dortal war an dachenn-se. Kontañ a ra penaos he deus douget klemm a-enep ur c'hannad all, eil-vaer Pariz, iz-prezidant an Vodadeg Vroadel evit difenn gwirioù ar maouezed.

Ur brezegenn dedennus e oa, a lakae war wel penaos e c'hell uzenniñ fiziañs un den en demokratelezh. Evit Isabelle Attard ez eus doareoù all d'ober, en ur implijout startijenn hag ijin pep hini war ar pemdez, ha nompas gortoz pep tra eus ur gouarnamant a lak re

da vezañ ur seurt c'hoariva margodennoù. Dizezañ a ra he mennozhioù war skridoù ha teulfilmoù (re Emma Goldman, Voltayrine de Cleyre, Francisco Ferrer ha reoù all) ha klozañ a ra gant frazenn an anarkour Reclus : "L'anarchie est la plus haute expression de l'ordre".

LL



Bro-Japan

KAROSHI

Un implijad(ez) japanat diwar pemp zo en arvar da vervel el labour abalamour d'ar regas*. An anadenn-se zo deuet da vezañ ken pouezus abaoe derou ar bloavezhioù 2000 ma 'z eus bet roet un anv dezhi e japaneg : karoshi a vez graet anezhi, ar pezh a dalvez mervel abalamour da labourat betek re.

Hervez lezenn al labour ez eus regas en tu all da 80 eurvezhiad ouzhpenn bep miz. Ma c'hoarvez d'un implijad(ez) mervel trumm ha ma vez diskouezet splann en doa graet muioc'h eget 80 eurvezhiad ouzhpenn bep miz e c'hell e gerent dougen klemm ouzh an embregerezh. An eurvezhiadoù ouzhpenn zo lod eus ar sevenadur japanat a-fed labour. E-barzh ar c'hard eus an embregerezhioù pe hogozik e ra an implijidi muioc'h eget 80 eurvezhiad ouzhpenn bep miz. Hag e-barzh un embregerezh diwar 10 e vefe anv eus 100 eurvezhiad ouzhpenn ha muioc'h zoken. E-barzh gennadoù an teknologiezhioù kelaouiñ hag an trañportoù war hent e kaver 40% eus ar c'hopriddi skoet gant ar regas. Ur blegenn arvarus eo. Bep bloaz e varv kantadoù a Japaniz gant ur gwallzarvoud kalon pe gant ur gwallzarvoud empenn abalamour d'o

labour skuizhus. Ha n'eo ket tout. Ar c'haroshi zo kaoz eus emlazoù hag eus taolioù emlazh ivez. Ma vez kredet mediaoù japanat zo eo ar c'hopriddi o-unan a zibab labourat betek an tarzh-bec'h* hag ar marv. E giwrionez eo al labourat kalz ur brouenn ag engouestl ha lealded e-keñver e embregerezh. Kemeret zo bet diarbennoù gant ar vaodierned ha gant embregerion zo evit saveteiñ ar c'hopriddi iskis-se a zo prest da labourat diwar-goust o yec'hed evit mad o embregerezh hag armerzh Japan.

A dreizhoù* souezhus

Reiñ a ra izili ar gouarnamant skoazelloù arc'hant d'an embregerion a vroud o gopriddi da grennañ war o c'hementad a eurvezhiadoù labour ha d'ober ehanoù. Bez' ez eus muioc'h-mui ag embregerion a ginnig salioù ehan d'o gopriddi, lec'h ma c'hellont ober ur chouk. Embregerion all o deus divizet lazhañ ar goulou da 10 eur noz evit rediañ o c'henlabourerion a intampi* da vont d'ar gêr. Bez' ez eus ivez deus embregerion a glask mirout ouzh o implijidi da chom re ziwezhat el labour a-drugarez da vijiled. An



hentenn vrudetañ eo bet e-pad pell. E-karg eo ar remañ d'adkavout an implijidi intampiusañ evit kas anezho d'ar gêr. Met evel ma 'z eus un diouer spontus a goskor er vro ez eus ivez nebeutoc'h a vijiled.

Bez' ez eus ur c'hevredad a surentez en deus ijinet un dron, "T-rend" e anv. An dron-se zo e bal nijal a-us da vurevioù an embregerezhioù ha da skignañ ar ganenn skosat "Auld Lang Syne". An ton-se a vez skignet e Japan evit reiñ da c'houzout d'ar pratikoù emañ ar stalioù-se o vont da serriñ o dorioù. Heskinañ a ra an dron an implijidi betek ma paouezfent gant o labour.

Pennoù bras Yahoo o deus roet an aotre d'o gopriddi da labourat un nebeud devezhioù bep miz er gêr

evit reiñ tu dezho da verañ gwelloc'h o amzer. Lakaet o deus en o soñj zoken diazezañ ar sizhunvezhiad a bevar devezh zoken adal 2020.

Mouezhioù a-enep

Evel-just ez eus abegoù all hag a zispleg emzalc'h digredus ar c'hopriddi-se. Sevenadur an embregerezh, hec'h-unan, n'eo ket trawalc'h evit e zisplegañ. Ma labour an implijidi japanat kement-se n'eo ket bepred dre zibab. Re alies e tleont labourat a-lazh-korf, droug pe fach a vefe ganto. E-barzh embregerezhioù zo e vez ken izel ar goproù ma tle ar c'hopriddi ober eurvezhiadoù ouzhpenn evit gounit arc'hant a-walc'h. E-barzh embregerezhioù all n'eo ket

paet an eurvezhiadoù ouzhpenn zoken.

Dre chañs eo kondaonet ar c'haroshi gant muioc'h-muiañ a Japaniz. Skoazellet int gant politikourion ha sindikadourion hag a zo a-enep an doareoù-se d'ober. Hervezo eo ret d'an implijourion krennañ eurvezhiadoù o gopriddi. Dav eo dezho paouez da rediañ anezho da gevezañ an eil re gant ar re all evit bezañ an hini a ra ar muiañ a labour e-korf un amzer resis. Ha goulenn a reont groñs ma vo kresket ar goproù rak ker-ruz eo ar vuhez e Japan.

War-raok ez a an traoù er gevredigezh met goustadik. Diaes eo ar blegenn, ken diaes eo abalamour da goshadur ar boblañs ivez. Nebeutoch-nebeutañ a dud oberiant gopret a zo ha renerion Japan a chom etre daou soñj evit implijout estrenion. Ar c'hopriddi japanat ne c'hellont ket mont war o leve a-raok 65 bloaz, ha muioc'h zoken. Kalz anezho, ouzhpenn-se, ne gredont ket kemer vakansoù. Ober a reont gant ar pemzek gouel bloaziek evit gellout diskuizhañ un tammig bihan.

PLB

*regas : surmenage
*tarzh-bec'h : burn-out
*adreizh : reforme
*intampi : zèle

Sport

GOUREN, ADARRE!

E-pad mizioù n'o deus ket gellet tud 'zo ober o sport abalamour d'ar C'hovid. Evit ar c'hourenerien, judokaed hag all eo bet gwashoc'h c'hoazh : n'eo bet aotreet endro ar sportoù "emgann" e

Frañs nemet e-kerzh miz Gouere. Ha c'hoazh, nullet eo bet holl dournamantoù gouren boas an hañv. Den ne oa prest da gemer ar riskl da aozañ ur genstrivadeg d'ar mare-se. Un hañvezh

hep gouren a vije bet ur ranngalon evit kalz tud.

Setu perak o deus divizet a-gevret Skol Gouren Speied ha Bodadeg ar Gouren aozañ un darvoud gouren a galite,

en diavaez ha war un dachenn brevez met gant an holl asantoù ret (maer, pefed...). E Reun ar Bleiz, war dachenn Maodez Huon, gourener anavezet-mat e Speied, eo bet dalc'het an abadenn, neuze. 28 gourener-ez hag un ugent bennak a dredeged a zo en em gavet evit un abardaevezh gouren a live uhel-mat. 7 tournamant dre rummad pouez a oa raktreset, 2 evit ar maouezed ha 5 evit ar baotred. 2 dournamant "holl rummadoù" a zo bet ouzhpennet evit brasañ plijadur ar sportourien. Prizioù brav-eston a oa evit ar re wellañ, krouet gant arzourien ar vro : engravadurioù Ronan Broustal, chopinoù engravet Barbara Vasquez, pladoù seramik Mari Toulhoat pe c'hoazh kizelladurioù koad ha maen Riwall Huon ha Frank Renaudineau.

An disoc'hoù a gavoc'h amañ-dindan met ar pezh

a chomo eus an devezh dreistordinal-mañ a zo dreist-holl ar blijadur d'en em gavout en-dro, d'ober gouren pe da arvestiñ outañ, mousc'hoarzhioù an dud (dindan o maskloù)...

Maouezed :

-65 kg : Aela Bricaud-Salomon (Louergad)
+65 kg : Régine Le Bloas (Speied)
Holl rummadoù : Tiphaine Le Gall (Speied)

Paotred :

-68 kg : Tudy Le Meur (Kemper)
-74 kg : Clément Priol (Gwipavaz)
-81 kg : Mathieu Le Dour (Ar Faoued)
-90 kg : Anthony Salaün (Pleiber)
+90 kg : Yann Pansard (Speied)
Holl rummadoù : Mathieu Le Dour (Ar Faoued)

Hoel Maleuvre



© Pauline Sellin

Glad

KASTELL PONTKALLEG

An holl o deus kanet, un deiz bennak, ul lod eus gwerz "Marv Pontkalleg" ha dreist-holl an diskan mil vrudet : "Treitour, ah ! Mallozh dit 'ta !". Renablet e oa bet gant Kervarker e-kerzh an XIX^{vet} kantvet hag embannet gantañ e-barzh ar "Barzhaz Breizh".

E deroù ar bloavezhioù 70 e oa bet Eliane Pronost an hini gentañ o kanañ anezhi adarre, enrollet m'eo bet war ur bladenn gant "Mouez Breiz". Goude Gweltaz Ar Fur, Alan Stivell, Gilles Servat, An Tri Yann a Naoned o deus kaset ur vrud dispar d'an ton.

Diazezet eo ar gwerz war istor gwir irienn Markiz Pontkalleg ha tri c'heneil dezhañ, Talhouët, Montlouis ha Du Couëdic. Savet o doa a-enep kresk an taosoù graet gant ar rejant Fulub a Orleans goude marv ar roue Loeiz XIV e 1715, rak rivinet e oa Bro-C'hall dre ar brezelioù niverus ha drastus kaset a-benn gant ar roue kozh. Siwazh, kalz treitourien a oa war-dro an iriennerien. Diskuliet int bet,

toullbac'het ha dispennet war blasenn Bouffay e Naoned d'ar 26 a viz Meurzh 1720. Frometre e oa bet tud ar bobl hag ar werz a voe krouet evit mirout koun eus planedenn c'harv ar markiz, o lidañ, dre beder lodenn, e nerzh-kalon evit difenn ar Vreizhiz, penaos e oa bet diskuliet, ha goude e harzidigezh, ar veaj betek Naoned hag e varnedigezh, erfin tristedigezh an dud pa oa bet embannet e varv gant person parrez Berne, lec'h m'edo kastell Pontkalleg.

Al lec'h

Hervez an dielloù e oa bet savet ar c'hastell kozh e 1332 war ur roz a-serzh a-us ul lenn, gwarezet gant ar stêr-Skorf, war ar c'hornôg hag ur c'hoad a mil devezh-arat war ar c'hreisteiz. Mogerioù kreñv a voe ouzhpennet e 1591. Ur c'hreñvlec'h all a voe savet e 1657. Hemañ a zo bet devet e 1791 gant gwarded broadel ar Gemene hag Ar Faoued. Ar relegoù nemeto a gaver war un

dosenn vihan war ribl an hent o vont betek Kernaskleden. Div voger gant ur prenestr hag un nor gant diri a chom c'hoazh. Ur rouedad a hentoù dindan zouar a c'hellfe bezañ dindan an dosenn. Ar c'hastell a weler hiziv an deiz war ribl an hent D110 a zo bet savet gant an dug a Cossé-Brissac e 1882 gant ur savadur kreiz ha daou all war ar c'hostezioù. War bord an hent hag er park, ur chapel vihan anvet Santez Anna ar C'hoadoù a zo bet savet gant ar gontez a Cossé-Brissac goude ganedigezh he merc'h hag ur bromesa graet da Santez Anna. Gouestlet e oa evit ar gastelliz nemetken, met, betek fin ar XIX^{vet} kantved, bep Lun Gwenn¹ deiz ar pardon, en em vode un dek mil a dud aze. War tu all an hent e chom ur golonenn gant ur delwenn warni, dilerc'h ur chapel kent.

Met e 1955, ar perc'henn, berr an arc'hant gantañ, en deus gwerzhet ar c'hastell hag an domani a 100 devezh-arat pe war-dro, d'ar Seurezed Dominiged a Spered Santel.

Er bloavezhioù 60 zo bet ouzhpennet ur c'hloastr savet gant mein o tont eus chapel santez Kristina e Lokmalo.

Ul lec'h degemer

Eno e oa, da gentañ, un dornad merc'hed a-ouenn-vat a oa deuet eus Paoul evit ober war-dro un tregont bennak a baotred emzivat ha reiñ bod dezho er c'hastell, anvet "an oaled". Dibaoe o deus bevet kantadoù a emzivad pe paotred gant kudennoù liesseurt o deus bevet en oaled, met diaesoc'h-

diaesañ e oa deuet ar mont-en-dro ha serret eo bet an oaled e 2013. Bremañ zo eno un tregont seurez bennak oc'h ober war-dro 115 plac'h yaouank skoliataet en ur skol diamreviat er-maez kevrat² ha digoret e 1977.

Gweladenniñ park ar c'hastell a zo aotreet, met serret eo etre ar 26 a viz Gouere ha 20 a viz Eost.

MM

¹Lun Gwenn : Lundi de Pentecôte
²Skol diamreviat er maez kevrat : Ecole non mixte hors contrat



Kastell Pontkalleg © Marsel Modir



Skornenn artizanel Breizh






Deuet eo an diskar-amzer grit buan war-dro ho prenadennoù

jampiglacier.com



Kerguillo, 29820 Brest (Bohars)

GANT FRILOUZ



GERIOÙ-KROAZ

k579 (diaes) gant J.-F. Peden

	I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX
1									
2					■				
3							■		
4	■				■				
5	■								
6						■			
7			■				■		
8				■					
9								■	
10				■					
11									■

A-BLAEN:

– 1. Bezañ imoret-fall. – 2. Skuizhder a zeu pa vez kavet hir an amzer. Dont a rae da vezañ niverus. – 3. Bro an hebraeg. Domani Internet Sant-Tomaz ha Priñs (São Tomé e Príncipe). – 4. Bezañ, me ha bremañ. Etre thêta ha kappa. – 5. Ruz-glaou en oaled. – 6. Kaout e c'hoant, gounit. Komzer stuc'hiek-kaer. – 7. Araogenn mesket. Evel Zatopek e raio. – 8. Na dirak ur vogalenn. Enepster da "sach". – 9. Kantren a rin (kemmet). Mont a rae. – 10. Mont a reer. Ober a raed gant ur rasker. – 11. Gourdroutent.

A-SONN:

– I. Na bag-dre-dan, na bag-dre-lien met lusket gant tud zo kreñv o divrec'h. – II. Kanol vihan a gas an dour d'an traoñ, a-stlabez. Mekanik a ra tammoù bihan. – III. Tennet he laezh digant ar vuoc'h. Lakaio (an oto) er c'harrdi. – IV. Netraour. – V. Delc'her penn a raint. – VI. N'eo ket evel stuc'h ar 6 (2) a-blaen. Deue da vezañ donoc'h. – VII. Lavar ezen pa vezer un ejen. Estlammadell. Zink ar c'himiour. – VIII. N'eo ket ar memes ster penn-da-benn. N'eo ket lous. – IX. Dindan ar gabitened.


SUDOKU..... live etre

2			7	6				1
		3	4					
1	8							2
			6	4	5			3
	5			2				7
9		8	3		5			
	1							3 8
					1	4		
4				3	7			2

Diskoulmoù

Z	S	I	L	E	8	6	9	7
6	9	7	I	S	Z	L	E	8
8	E	L	9	7	6	Z	I	S
9	I	Z	S	L	E	8	6	9
7	L	8	6	Z	I	9	S	E
E	6	S	7	8	9	I	Z	L
L	Z	9	E	6	S	7	8	I
S	8	6	Z	I	7	E	L	9
I	7	E	8	9	L	S	6	Z

DA LENN.....



AR C'HLASKER-AOUR

Loeiz Gwilhou

Al Lanv, 284 p., 14€

Setu aze 15 danevell, kinniget en urzh kronologel, ar re goshañ (2008) da gentañ betek ar re nevesañ (2019). Kaozeet e vez kalz eus ar Pont (Pontekroaz) eus Ploeneg, pont ar Geridreu... met ivez, dre ma ya, eus ar Faou, eus Pariz... En amzer dremenet int lec'hiet peuviañ, met ket atav.

Meneget e vez an aozour, Loeiz(ig) met ket atav. Istorioù gwirheñvel a ziskriv ar gevredigezh eus an diabarzh int, met ket atav (e "Mumu" zo kaoz eus ur c'harr a gomz). Danevelloù zo a zo hir (met gant "Mumu" n'eus nemet 7 pajennad enni) hag, a-wechoù, e adkaver tudennoù eus an eil d'eben (Pierrot, Jeanette, Kati...)

Gant al levr e vez taolennet ur gevredigezh zo bet hag an darempred disheñvel a oa etre an dud, paourentez lod, mod da vevañ lod all, tud yaouank o klask war-lerc'h ar garantez, an divroañ war-zu Pariz...

A-dreñv e skridoù e veizer ar skrivagner, paotr ar Pont, tost eus ar sevenadur, ar stourmoù, ar yezh... Dav bezañ dihun-mat evit heuliañ red e istorioù, implijet ma vez al lizherennoù stouet, ar c'hilselloù... Met talvezout a ra ar boan rak kompren a reer gwelloc'h penaoe eo bet ar c'hantved tremenet 'kostez bro Vigouden.

SKINWEL



Brezhoweb TV

www.brezhoweb.bzh

AL LOUARN HAG AN ARZH

Mojenn kontet gant Awen Plougoulm evit an abadenn "Mojennoù".



Frañs 3

www.france3breizh.fr

BALI BREIZH *d'ar Sadorn 10 a viz Here da 10e45*

E Rostrenenn en-dro, e maner Kampostal ar wech-mañ, deuet da vezañ ur skolaj hag ul lise. Goulwena a adkavo Jeannot Flageul du-se, nevez dilennet en ti-kêr gant ar c'hoant bodañ an dud tro d'ur raktres evit reiñ muioc'h a startijenn c'hoazh d'ar vro-se. Thelo en deus pedet Jeannot Le Coz, kampion dañs fisel. Kendalc'het e vo gant an heuliadig "boest an diell". Daou ziell a vo diskouezet : unan bet filmet e 1966 diwar-benn ar c'hentañ kenstrivadeg fisel e Groñvel hag unan all gant an daouad Erik Marchand/Yann-Fañch Kemener o kanañ e 1982. Sellet e vo ouzh ur film gouestlet da Hyacinthe Guégan, ur soner treujenn-gaol eus Bro Rostrenenn anavezet e Breizh, ganet e 1924, ha marvet e 2016. Setu "N'eo ket echu ar fest ganimp" bet sevenet gant Ronan Hirrien.

REKIPEOÙ Marsel Modir

ANDUILH AR GEMENE

Er Gemene, war ribl ar stêr Skorf, e fard ar familh Rivalan-Kidu anduilh dibaoc 1931 diwar ur rekiye hengounel. Setu penaos eo graet ganto :

Gant bouzelloù moc'h – moc'h Breizh nemetken – anvet "chaudins" e galleg pourvezet gant al lazhti Bernez eus Logunec'h e kroger. Ar "chaudins" a zo lakaet e-barzh holen o tont eus Gwennrann hag e chomont mod-se e-pad un nebeud devezhioù e-barzh ur gambr yen.

Goude e vez troc'het ar "chaudins" a-dammoù, dre bennadoù, ha didoueziet eus an treuzkiz bihanañ betek an hini ledanañ. Da gentañ e vez fardet ar "galon" gant louanoù¹ tanav strollet gant ur tamm fiselell lin ha sikour un nadoz.

Pouezus-tre eo prientiñ mat an dra-se evit ar pezh a zeu da-heul.

War-dro 20 (etre 15 ha 25) bouzellenn a zo gwriet asambles hervez urzh an treuzkizoù dibabet. Goude e lakaer anezho, unan-hag-unan, war ar galon evel ma vefe lakaet meur a loerenn war un troad.

An doare-se a ro an neuz a gelc'hioù kengreiz² a gaver evel heverk gant anduilh ar Gemene. Dre ma 'z a al labour war-raok, e vez skrabet ha dilardet pep "chaudin" gant ur gontell. Ugent munutenn a zo ezhomm evit un anduilhenn a 2,5 kilo.

Mogedetevezananduilhennoù gant moged gwez-faou, e-pad meur a zevezh. Ar mogederezh a ro ur blaz dibar hag asuret e vezer e chomo mat an danvez.

D'ar mare-se he deus kollet an anduilhenn un drederenn eus he fouez ha ne ra mui nemet 1,7 kilo.

Ur wech mogedet e chom an anduilhennoù a-istribilh e-pad etre 2 ha 3 sizhunvezh. Er fin e pouezont war-dro 1,3 kilo. Un nebeud anezho a chomo nav miz ouzhpenn, a-skourr, e solier ar stal, ur chem³ a zouj ouzh hengoun an anduilh fardet gwechall en atantoù hag a chome mizioù er siminal a-raok bezañ debret.

Pa vez poazhet eo broudet an anduilh evit mirout a darzhañ ha dieubiñ a ra an druzoni en diabarzh. Splujet e vez e-barzh ur gastelodennad zour e-lec'h ma chom da boazhañ etre teir eurvezh hanter ha peder eurvezh en dour o skrijañ. En dibenn ne bouezo mui nemet war-dro 600 gramm.

Debret e vez an anduilh evel digor-galon, a jelkennoù moan war un tamm bara, er saladennoù, alumennoù, kichennoù⁴, kekoù⁵, pidzaioù, krampouezh... hag ar meuz hengounel anduilh tomm ha yod avaloù-douar, ha gwelloc'h c'hoazh gant ognon karamalet, un drugar !

Mat eo ivez gant kregin Sant Jakez ha pesked gwenn.

¹Louan* : Lanière

²Kelc'hioù kengreiz : cercles concentriques

³Chem : Savoir-faire

⁴Kichenn : Quiche

⁵Kek : Cake



Anduilh a-istribilh er stal Rivalan-Kidu e Gemene © Marsel Modir

SINEMA Jean-Claude Le Ruyet



UNE NUIT AU LOUVRE

Un teulfilm gall sevenet gant : Pierre-Hubert Martin (2020)

Gant : Vincent Delieuvin, Louis Frank (1e30)

Bremañ, gouied a rit, ha komz a ran amañ ag ar re a vez é chom en o froviñsoù, pell a-zoc'h ar gêrbenn milvrudet, bremañ e red hag e tered ar Fransizion da Bariz evid chom heb mankoud espozadegoù ar Palezoù, braz ha bihan, mirdi Orsay, Beaubourg (hennañ gant 91milion a vudjed-bloaz, ha pegement evid difenn ar brezhoneg ?). Iver a-walc'h eo ; nawazh, evel ma lâr unan (Catwoman) : "La culture est difficile d'accès pour les provinciaux, les handicapés, longues files d'attente, le coût !" Setu perag n'eo ket fall ar film-mañ evid roiñ, d'ar "broviñsidi" na faot ket dezhe redeg pell, un tañva ag un diskouezadeg a oa bet diwar-benn Leonardo Da Vinci er Louvre, bloaz so, evid lidañ pemp kant vloaz e varw e kastell Amboise, e 1519.

Daou zen hon laka da ouied hirroc'h, an daou gomiser ag an espozadeg : Vincent Delieuvin ha Louis Frank. Gante e arrestomp dirag oberennoù brudet ar mestr, unan a speredoù pennañ an denezh. Ne oa ket hennañ livour hebkén, mez skulter, filozofer, arkitekt, ijiner ha kement zo. E peb domani e tegase nevezterioù. Karnedadoù tresadennoù en deus laosket, mez a-fed livañ, nen doa ket graet kalz a daolennoù, un ugent bennag. En o mesk, oberennoù anavezet dre ar bed a-berzh, evel Den Vitruv, Ar Werc'hez e-tal ur roc'h, Sant-Jerom, Portred ur muziker, Ar Goan-ziwzehañ, ar Jokond, Sant-Yehann ar Badezour. Tri bloaz a lakae peurliesañ evid sevel un daolenn. Ar Goan-ziwzehañ, bet livet war ur vur e kouvant Santa Maria delle Grazie e Milan, zo é voned da goll, a-gaoz d'ar lindraj (an indu) a zo dindan, mez adlivet e oa bet war un daolenn nepell goude, lec'h ma en doa notet Leonardo Da Vinci e-hunan anvioù peb unan ag ar gouvidi. Laoskomp a-gostez s'ioù ar film : re a bouez roet d'an daou

gomiser, filmet re liez o daou éc'h edmegañ o-hunan an taolennoù, pe éc'h ober gant ur galleg chik-cheuc'h beteg re. Ur bern traoù memestra a zesker gant ar film, ha gwelet e vez, braz-braz, munudoù peb taolenn. Ur soursi en doa Leonardo da Vinci : roiñ buhez d'e zaolennoù. Faotoud a rae dezhañ taolenniñ "luskoù an eneoù". Hag evid-se en doa pellaet a-zoc'h ar fesonoù a veze re livourion an amzer en e raog. Pa veze implijet gwennoù-ui evid liammañ ar pigmentoù, eñv a rae kentoc'h gant eoul. Rag gant eoul e c'helle roiñ muioc'h a soupted d'e labour, doned en-dro liez war e oberenn, adober tachadoù zo. Ha peb tra enne gant ur sinifiañs resiz, evel dleet. N'eo ket evid netra e komze a "skiant ar livañ".

Evel-just e chom Ar Jokond e oberenn vrudetañ. Livet e oa bet war ur blankennig bupli, ha n'heller ket hiziv kas ha degas an daolenn ag ur mirdi d'an arall kén, evel ma vez graet evid sevel diskouezadegoù dre ar bed. Re vresk ema daet da vout. Beb bloaz e vez sellet douti pervezh, e-pad un nebeud deizioù, gant tegnisianed ar Louvre, kent d'an daolenn boud lakaet en-dro en he lec'h, ur lec'h dediét er mirdi braz. Evid plijadur milionoù a-dud, bamet gant minc'hoarzh misteriuiz Lisa Maria Gherardini, a oa bet gwreg ur marc'hadour seiz, Francesco del Giocondo. Livet e oa bet portred ar vaouez yaouank-se etre 1503 ha 1506, da lâred eo ur bemp bloaz bennag goude ma oa bet embannet ar C'hatolikon, kentañ geriadur latin, brezhoneg ha galleg, e Landreger gant Jehan Lagadeuc, e 1499.

An Adginivelezh a douche toud ar broioù en Europ d'an amzer-se. Gant Leonardo da Vinci e welomp pouez tud zo, gouest da lakaad sevenadur broioù a-bezh da gemm, da araokaad, a-drugarez d'o skiant, d'o arz, pe d'o spered.



Selaouit ar pennad-mañ e podkast war Radio Breizh.
www.radiobreizh.bzh > Steñv al lec'hienn > radio bro gwened > sinema

GERENUK, ANTILOPENN BRENN-HOUARN

Gant Goulc'han Kervella

Laouen-bras e oa ar strollad DALBG – da lavaret eo Difennerien Al Loened Bet Gouez – d'an dregont a viz Gwengolo 2022. Bodet e oant war dachenn Brenn-Houarn e Bro-Wened, ar zoo diwezhañ o serriñ e Breizh ar pemp departamant. Un diskouezadeg hag ur gouel bras o doa aozet en unan eus al laboù bras ma veze kraouiet, kentoc'h, al loened. Tigred, leoned, louparded, antilopened, jirafened, dourvarched, frikorneged, naered, marmouzed hag all... An holl anezho a oa bet dieubet ha kaset en-dro d'o bro c'henidik, goude dezho bezañ bet ganet, ar pep brasañ anezho, e Breizh.

Ur gevredigezh taer ha youlek e oa eus DALBG. Meur a vloaz 'oa edont o pleustriñ war planedenn c'harv an anevaled. O stourm evit digeriñ kaouedoù ha kaouedigelloù al loened kroufet didruez. Difennerien gwirioù mab-loen, na petra 'ta ! A-benn e oant deuet da lakaat serriñ tachennoù loened ha poullou pesked Gwaien, Sant-Jakud, Bourbansais, Tregomeur, Marinum Konk-Kerne, Sant-Malou, Plouagad, Pont-Skorf, An Tri Ferson, Park an Arvorig, Oceanopolis hag all... A-drugarez d'ar maerezed ha maered glas-kaol, bet anvet niverus da geñver dilennadegoù ar bloavezh 2020, e oa bet kalz aesoc'h o labour. Digraouiet e oa bet pep loen ha kaset d'e vro a-orin, Afrika, Azia, Amerika, Oseania, Siberia, Europa an hanternoz pe ar c'hreisteiz. Ar sirkusioù o doa gellet serriñ ivez – ne oant ket gwall stank e Breizh – ha difenn ouzh ar sirkusioù estrenvro da zont da Vreizh.

Diaes e oa bet da lod eus ar vaered asantiñ d'ur seurt disentez. Dreist-holl abalamour d'ar vugale, sot gant an anevaled, ha d'an douristed, e kêrioù na veze ket gwall stank an abadennoù sevenadurel en hañv, estreget Moukled-fritez, Skarzh-kalatrez, C'hoari loto, Gouel ar vag-savetaj, ar micherioù kozh pe ar vezhinaerien. Kerse o devoe kêrioù Benoded, Ar Forest-Fouenant, Perroz, Rosko, Brignogan, Porspoder, Konk-Kerne, Rianteg, ar Baol... d'ar sirkusioù. Ne oa ket bet aes bep tro. Gant ar Spontus Sirkus Pagan o doa bet an hirañ a vec'h. Ur sirkus e oa hennezh eus arvor Bro-Leon oc'h implijout moc'h en o abadennoù : gwizi, binvi, hoc'hed, terc'h, porc'helloù, moc'h bihan. Dudi a zegasent d'an arvesterien o welet hoc'h pe wiz, o c'hoari patati hag ober lamm-choug-e-benn dreist ur poullad hañvouez. Brud vat a zegasent da Vro-Leon evit

ar c'hig moc'h. Gouezet o doa Leoniz lakaat ekonomiezh da glotañ gant sevenadurezh. Gant ekologiezh ivez, 'mit-hu ?

Ya, laouen-kenañ e oa tud ar strollad DALBG, ar sadornvezh-se da noz, d'an dregont a viz Gwengolo. Laouenoc'h a se dre ma oa da zont d'ar gouel difennourez veur al loened. Berc'hed Barrenn-Zour. A-hed he buhez he doa stourmet Berc'hed evit gwirioù al loened hag o dieubidigezh. A-enep ar gouren e Gourin, paourkaezh miti merzheriet ; a-enep red ar c'hilhog, e Kerlouan ha red ar c'hezeg e Ploueskad ; a-enep touzañ an deñved e enez Eusa ha taoler dre ar genou bigouroned e Porsal... Trec'hioù meur evit enor ha gwirioù an anevaled gwasket. Hiriv e oa dervezh diwezhañ an emgann a-enep ar zooioù. Diouzh ar mintin e oa bet dieubet anevaled diwezhañ Brenn-Houarn : an antilopenn Gerenuk.

Mintin abred e oa bet digoret kaoued Gerenuk e savanenn kreiz Afrika. Pell hag hir e oa bet padet ar veaj gant ar c'harnij a-barzh en em gavout e bro e henloened. Ha bremañ edo Gerenuk, ur par antilopenn tri bloaz, brav ha mistr, o c'haloupat



a-dreuz ar maezioù ec'hon. Na pegen kaer e oa ar vro nevez dindan bannoù lugernus an heol flour ! Na brav ar geot, ar bleunioù, ar brousadoù, hag ar gwez uhel rouez bep al lec'h. Na pegen tomm an amzer ! Ha pegen dudius 'ta, kanal laboused, richan an amprevaned, sardon ar gwenan hag an nadozioù-aer. Na frondus ha saourus ar geotenoù, al louzaouenoù, ar bokedoù. E-skoaz el lec'h ma oa bet ganet ha savet, e Breizh-lzel : trist, strizh, teñval, yen, leizh. Goular ar boued o deze da zebriñ ha dreist pep tra, pegen kasas ar vugale hag an douristed a zeue da sellet

Penaos e "Ya!" ar bed
 Un abadenenn radio kinniget gant Arvorig FM. Bep gwener noz, da 8e10, e vez lennet danevelloù gant Goulc'han Kervella. **A-benn argwener g'ar viz Heree volennet "Gerenuk, antilopenn Brenn-Houarn"**. Adskignetevod'ar Sadorn da 4e30 gm ha d'ar Sul, da 11e30 mintin. Podkastoù war lec'hienn arvorigfm.

outo, oc'h ober ardoù, o klask o flourañ, o tennañ poltriji diouto hag o teurel dezho moc'haj da zebriñ. Amañ er savanenn, da vihanañ, e oa digavandenn ar maezioù. Loen daou droad ebet war-dro. Ya, laouen, adkavet en doa Gerenuk e vro.

E-pad an deiz e kantreas an antilopenn a-hed hag a-dreuz ar savanenn. Gant dudi e tebre geotenoù saourus. Savet war e bavioù a-dreñv, heñvel-mat ouzh ur jirafenn, e c'helle pakañ delioù c'hwec ar gwez akasia, baobab, kantolor, gwezenn an olifanted pe c'hoazh gwezenn ar spilhoù suterez. E-leizh a laboused liesliv a welas o nijellat ; amprevaned a-vil-vern o ruzañ, redek pe lamm. Na pegen kaer ha plijadurus e oa e vuhez nevez da c'Gerenuk. War-dro kreiz an deiz avat e rankas diwall ouzh ur pezh mell naer-wiber. Kalz brasoc'h eget naered Brenn-Houarn e

en em bakañ, en em lipat. Krog e oa ar garantez e korf hag e kalon Gerenuk. Ha kemend-all e kalon hag e korf Impala. Seurt karantez ne c'helle ket diwanañ e Brenn-Houarn. Pa oa an daou loen yaouank o vont d'en em barañ e tegouezhas ar maout Impala. Ur mell aneval, kerniel hir ha tort war e benn. Lezel a reas ur pezh blejadenn, savet sonn war e elloù. A-sav e chomas an daou garedig e-kreiz o ebatou. Tostaat a reas ar par korniok, darev da dourtañ ouzh Gerenuk. Hemañ ne ouie ket en em gannañ, e Brenn-Houarn ne veze ket desket dezho. Kilañ a reas dirak e enebour. Hag hemañ kuit, Impala war e lerc'h. Gant kerse e selle an antilopenn yaouank, suj d'he mestr-par, ouzh Gerenuk o pellaat.

Edo an noz o vont da serriñ, pelloc'h. A-raok ar c'huzh-heol en doa klasket Gerenuk tostaat ouzh loened all eus e ouenn. Evit kavout goudor en o ser en noz a oa erru. Pellaat dioutañ a raent, tec'het dirazañ zoken. En e-unan ec'h en em gavas. O tuañ edo ar gwez hag ar geotenoù hir. Tavet e oa anevaled an deiz. Reoù all a veze klevet bremañ, loened hag amprevaned an noz. C'hwezennoù gouez a gleve Gerenuk en-dro dezhañ. Unan dreist-holl, kreñvoc'h eget ar re all, hag a gleve e Brenn-Houarn, damdost d'e lokenn. Gant peseurt loen, c'hoazh ? Klask a reas un toull gwasket evit tremen an noz. Enkreiz bras a oa ennañ ha kerse d'e gaoued er zoo, el lec'h ma c'helle kousket dianken.

Birvilh bras a oa e Brenn-Houarn. Galvet e oant bet gant blenier B. B. N'edont ket a-bell ken. Ur banne a oa savet da frioù Difennerien al Loened. Gant fistilh e tegasent da soñj an eil d'egile ar stourmoù ma oant bet trec'h. Ne oa ket bet aes atav kas an anevaled d'o bro. Ur fazi bennak a oa bet. Kaset dek bleiz eus Park Arvorig Hanveg da enez Eusa. Na saourus e oa bet kig tener an deñved du da staon Gwilhoù ha d'e vreudeur louet. Distrujet ruskennoù gwenan an Nivod, e Lopereg, hag aet an hedoù gwenan da gludañ e ti ar re gozh, e Brasparzh. Muioch a dud kozh a varvas eno gant ar flemmadenoù, eget gant virus ar vosenn nevez. Ma, petra reoc'h ! Ne vez ket tennet bleud gwenn diouzh sac'h du

ar glaouer. Zoo Brenn-Houarn a oa bet an diaesañ da serriñ. E-pad pell amzer o doa ranket breutaat. Dreist-holl a-enep difennour bras an natur, Kolaz Hopernoz. Digoret en doa hemañ, e Brenn-Houarn ur greizenn enklask er zoo evit studial ar bevlieseured. Er zoo e c'helled bodañ ar gouenoù loened a oa en arvar. Ur skol a oa ivez evit kizidikaat ar re yaouank war gudennoù an natur. Raktresoù kaer, war e veno.

Hogen, lakaet o doa Difennerien al Loened, bredvezeien-loened, da lavaret eo medisined war gleñvejoù al loened, da bleidiñ gant ar gudenn. War o meno e oa klañv loened ar zoo gant ur c'hleñved nevrotek anvet zoochose. Pavata a rae an anevaled kraouiet, horjellañ a rae o c'horfoù, hejañ o fennoù ; en em c'hoazañ o-unan, gant o dent pe o skilfoù. Anat e oa e c'houzañvent kalz diwar ar vuhez dinaturel-se, pell diouzh o anien ; tamm buhez prevez ebet dezho. Merzheriet e vezent gant youc'hadennoù ar vugale ha luc'hed ar binvioù-poltriji. Ha daoust da vreutadenn entanet Kolaz ez eas ar maout gant ar strollad DALBG. Ret-groñs e oa lezel al loened dieub, evito da c'hellout redek en o bro gozh, klask o boued o-unan ha dibab par pe barez. En em gavet e oa Berc'hed Barrenn-Zour e Brenn-Houarn, pelloc'h. Gant strakadennoù daouarn ha hopadennoù a levnez e voe degemeret. Forzh pegen pell e oa aet ar stourmerez war an oad e oa kaer atav da welet. Ur vantell graet gant ruskennoù gwez ha delioù plant a oa war he c'hein, ha n'eo ket krec'hin loened evel pa oa plac'h yaouank. Lakaet e voe da sellet ouzh an diskouezadeg ma veze gwelet an holl stourmoù kaset da benn gant DALBG evit eürusted al loened.

Meuleudi ha gourc'hemennoù a voe roet dezho forzh pegement gant Berc'hed, "kaol, treujoù hag all", e-kerzh he frezegenn leun a dan. Ha pa oant o sevel o gwerennadoù gwin pik-pik en enor d'al loen diwezhañ bet digraouiet, e teuas da soñj da c'Gerenuk gant peseurt loen e oa ar c'hwezh c'houez a gleve. Re ziwizhat ! Lammat a reas al leon war an antilopenn yaouank hag he drilhañ a dammoù bihan.

E gallaoueg

"LES LETTRES DU PÈRE MATHURIN"

Patrik Deriano



Goude "les Histoires de Jean Cudesot" s k r i v e t gant Joseph Chapron, setu "les lettres du Père Mathurin" embannet e-barzh "le Courrier de Châteaubriant" ar bloavezhioù da heul.

Je caozas l'aotr saecant¹ dez "Histoires de Jean Cudesot" écrites od Joseph Chapron e q'alirent pas pus lein qe 1932. Lez 19 lettrs q'i furent baniys taent vray haetantes², qheurus³ qhession de galo, e liantes, fi de garne. 'ét den yeùz q'en vait toute l'aezibetae⁴ a Chapron. Sement, vaila, en 1932, Joseph Chapron, il taet pus tellement lein de la breche. En 1934, il taet q'il fezaet sez talârs⁵ e il defuntit l'aney-la.

Il araet aossi ben peù ne pus y avoir de galo den lez paijes du "Courrier de Châteaubriant". Par boune chance pâmaenz⁶,

qheuq'un print la releve. Uét journs avant la Nouao⁷ de 1932, qheuges mais toute peine après la darraene⁸ lettr a Jean Cudesot, la premiere lettr du père Maturin fut baniy. Ça taet sour le tout titr-ilae⁹ q'ol peùt se leire toujours. Ol taet adercey a "monsieur le journaliste" come si q'ol taet envyey ao journalizouz. Si qe j'om tenant afaere a yun de la terre, lez diriys sont pus tafaet du memme tourn. Jean Cudesot regardaet pas trop a la politiqe. Le père Maturin ét pas li de memme, q'i va repaïsser¹⁰ lez degrigneriys¹¹ dez siens de son métier. Lez leizouz¹² du semaenier¹³ sont hardi de la campagne e c'ét compernabl qe le journal se met de lour tourn aossi ben.

Od qhi q'ont étae écrites lez lettrs du père Mathurin ? Qhi qe se qhute par darriere la signoriy¹⁴-ilae ? Vaila la grande qhession. Den un premier temp, en a peù sonjer qe ça taet Chapron q'i recontinauet

a sa mode lez lettrs de Jean Cudesot. Maez lez lettrs du père Mathurin ont durae diqa 1939 e memme pour la darraene, le 26 d'avrilh 1940. Maez deja en 1939, y en avaeet memme pus yûne par mais. Lez premiere anneys, il s'en terouaet ine trentaene a l'anney, maez de 1937, ça va pas dépasser la qhinzaene. Je n'n ae contaet 162 de yeùz en tout.

Aprés 1934, Chapron defuntae, ça q'i pouaet don pus étr li. Sembl qe sti-la q'i lez a écrites devaet comencer a étr en decours lez darraene anneys. De ça, il a pas étae bani de rasserrey¹⁵ dez lettrs du père Mathurin come pour lez lettrs de Jean Cudesot. Den le coup, je restom tenant en peine. La grafiy reste la memme qe yelle a Chapron. Par empl, lez [aw] sont écrits "aul" (biaul, sault). 'ét yun de sez élèves don, ben manqe.

La baniy de la rasserrey dez "histoires de Jean Cudesot" fut alozey¹⁶ par Paul Ladmiralet, le compozouz de Nante. Une aotr

fais, en 1934, il fezit mencion dez noces a Jean Cudesot. Paul Ladmiralet taet vrai portae pour lez écrits de memme en galo, cant il taent de Chapron toujours. Il taet vrai portae pour la Bertaegne etou e a étae un moment de temp den le PNB. Lez lettrs-ici sont ben den l'edit¹⁷ du parlement¹⁸ de la Mey. Ladmiralet taet-ti a le conaettr de façon ?

D'aotr cai q'i nouz interbole¹⁹, c'ét le moment de temp san baniy aoghûne de la fin de janvier diqa le 15 de julhet 1938. Qhi q'i saraet nouz dire si Ladmiralet taet bas d'aler²⁰ a temp-la ? Le père Mathurin dit ben dan sa darraene lettr-ici q'il a pas étae en cas d'ecrire durant un bout de temp. Ben sur, il peut inventer, maez n'iporte coment, y avaeet ben ûne raezon de manqer seiz mais de temp toujours.

En 1939, il n'n a zeù d'envyae, yun den l'aotr, qe yûne a chaqe mais e peis yûne core ao mais d'avrilh 40 e pus ren d'aotr.

E brezhoneg :

¹ N'eus ket pell	¹³ sizhuniég
² plijus	¹⁴ anv-pluenn
³ start	¹⁵ teskad
⁴ ijin	¹⁶ meulet
⁵ talaroù	¹⁷ giz
⁶ neoazh	¹⁸ rannyezh
⁷ Nedeleg	¹⁹ galv
⁸ diwezhañ	²⁰ klañv
⁹ an titl-mañ	²¹ merk
¹⁰ end-eeun	²² kreñv
¹¹ adlavarout	²³ sur a-walc'h
¹² droukklemmoù	²⁴ chom didrouz
¹² lennerien	

'ét ben ghigne²¹ qe l'ecrivouz devaet pus étr ghère vioche²², ben manqe²³.

Ladmiralet defuntit en sectembr 44.

De tout ça, lez bracs nouz en chairaent pas qe ça seraet Ladmiralet paraelh qer d'après q'il taet pas de grand rang e savaet rester san mener de brut²⁴.

(ao perchaen coup, lez mots de bilhet dans le "Guérandais")

GWAREZIÑ

Job an Irien



P e n a o s g w a r e z i ñ furchadennoù bet graet bloavezhioù 'zo evit ma c'hellfent b e z a ñ komprenet hirio c'hoazh ? Ar goulenn-se a droe em fenn 'doug an devezh d'an 20 a viz Gwengolo, deiz ar glad, p'em eus bet da glask reiñ da gompren d'ur strollad tud ar furchadennoù bet graet ganeomp daou-ugent vloaz 'zo war ar pezh a vez anvet "Kastell sant Tenenan" e Plabenneg.

Bez' ez eus eno, ouzhpenn ar vouldenn hag he douvez, rivinoù teir chapel bet savet an eil war-lerc'h eben war ar memes diazezoù. An hini diwezhañ, eus ar 16^{vet} kantved, a c'heller gwelet aes a-walc'h c'hoazh he stumm, rak e mein-benerezh eo bet savet.

An eil chapel, eus an 12^{vet} pe 13^{vet} kantved, bet savet ar mogerioù anezhi hervez un doare ispisial da Lezkelen, a gaver ivez war ar vouldenn, a zo dija diaesoc'h da lenn. Met an deirvet, an hini goshañ, eus an 10^{vet} kantved, kentañ chapel e mein el lec'h-se, n'eo ket anavezabl ken : an

amzer, an avel hag ar glav o deus graet o labour, ha lakaet an douar hag ar plant da c'holeiñ pep tra. Honnezh eo a oa an talvoudusañ evidomp-ni furcherien, peogwir e roe da anaout an doare koshañ da sevel un ti a bedenn war-lerc'h mare trubuilhet an Normanded. Mar deo dalc'het brav an diavaez d'ar chapel, ne c'heller ket lavaret ar memes tra evit ar savadur !

Evit ar vouldenn eo gwashoc'h c'hoazh. Meinet brav e oa bet he c'hostezioù betek ar ramparzh en nec'h, ar pezh a rae dezhi bezañ dispar, rak ral

int e Breizh. Gouzout a reomp mat eo bet implijet ar veinse gant an amezeien da sevel tiez ha krevier p'eo bet dilezet ar vouldenn. Met chom a rae c'hoazh tachadoù 'lec'h ma veze gwelet mat an doare da veinañ ar c'hostezioù, ha kement-se en un tachad betek an nec'h. Ne vez ket gwelet ken, koulz lavaret. Goude ar furchadennoù, e veze gwelet mat stumm an tour hag ar ramparzhioù e nec'h ar vouldenn. Kit d'o c'hask bremañ ! Un druez eo ! Ar gwez hag ar strouezh o deus goloet ul lodenn vat eus kostezioù ha nec'h ar vouldenn. Ne lavarint

netra eus argêriadenn e traoñ ar vouldenn, e-kichen ar chapel, rak dañjerus eo bale eno bremañ, rak toullou a zo, ha kement tra a zo goloet gant ar strouezh.

Penaos gwareziñ seurt furchadennoù evit ma c'hellfent c'hoazh reiñ da gompren un dra bennak eus hon istor d'ar re a glask o anaout ? N'eo ket a-walc'h troc'hañ pep tra, ret eo ivez diwriziennañ pep tra en tachadoù furchet, hag aze hepken, evit na savfent ket ken, hag aze siwazh ne welan doare all ebet nemet implij louzeier daonet 'vel ar Round-Up !

DAELOÙ AN GOURGLAZARDED

Gege Gwenn



Fin ebet da listennad an embregerezhioù en arvar e Breizh er mare-mañ, lod abalamour da Gorona, lod all evit abegoù gwall zisheñvel, ha mezhus un tamm. Ar pezh a zo boutin ganto eo enkreuz an dud o labourat eno, evito.

Tro hon eus bet da lenn en hor c'hazetenn muiañ-lennnet, e-barzh "ar journal" (kredapl ez eus bet kaoz ivez e-barzh kazetenn Roazhon)

eus ar situ-mañ ha penaos e sav uhel mouezhioù hon dilennidi evit mont a-enep ar freuz en ur glask diskoulmoù mat evit saveteiñ industriezh hor bro hag an implijoù. N'eo nemet daeloù gourglazarded. Tro am boa bet dija da embann va soñj diwar-se pa oa bet roet gant ar stad daou viliard da Renault en doa embannet e oa o vont da serriñ govelioù Kaodan. An aotrouien Le Drian ha Ferrand o doa savet o mouezh. Lavaret o doa renerien Renault ne vefe ket serret al labouradeg met disoñjet eo bet ar promesa-se ganto goude bezañ kemeret an daou viliard evit mont e godelloù ar gevranerien. Un arouez eus istor an industriezh e Breizh eo Govelioù Menez

Lokrist, anavezet evel Govelioù An Henbont bet prenet hag adprenet dre c'hoarioù ar gevalaourien na raent ket fouldre gant istor al lec'h, skipailh mell-droad ar Menez, ar familh Giovanelli...

Ar memes tra a zo bet e Poullaouen pemp bloaz zo : penaos un embregerezh a-familh eus ar vro, Pierre Chevance, o reiñ labour da gantadoù a dud a zo bet prenet hag adprenet ivez evit echuiñ gant Marine Harvest eus Bro-Norvej en deus kavet gwelloc'h mont da Vro-Bologn evit didroc'hañ ar jekkennoù eog. Petra a c'hellfe ober an gourglazarded o leñvañ, an dilennidi eus an tu dehou, ar re a an'ver bepred sosialisted, ? Reiñ

miliardoù n'o deus ket er c'hefoù evit saveteiñ an implijoù en ur ober van da grediñ promesaoù renerien an embregerezhioù-se ? Anavezet betek re eo ar ganaouenn. Enkadenn Korona a zo ivez un darn eus enkadenn ar C'hevalaouriezh a rank bepred kaout un enkadenn evit derc'hel gant ar profitoù. Evit ma vefe tud o c'hounit e ranker kaout tud o koll, roet eo bet ar gentel-se pell zo gant Karl Marks hag e kaver bepred tud oc'h ober van da vezañ souezhet !

Re simpl e vefe lakaat an holl embregerezhioù-se er mes paner ha lakaat Korona kablus da welet gant Nokia, Kaodan, Hutchinson e Sant-Brieg pe

Royer, ar botoù e Felger ? Evit Brittany Ferries eo anat, ha c'hoazh... Ar Brexit en deus un dra ivez da welet en afer. Evit Hop, bet Britair gwechall, eo kement Korona ha kudennoù an hin a laka diaes industriezh ar c'hirri-nij a rank mont war-zu ar c'hefluskerioù idrojen.

Poent eo cheñch penn d'ar vazh ha da gentañ. D'hon dilennidi a sav al lezennoù da ren an ekonomiezh, evit rediañ an embregerezhioù da baeañ an distruj sokial ha n'eo ket evit lakaat en o godelloù. Evit-se eo ret kaout an dilennidi mat ha cheñch reolennoù Europa. Pell emañ Yann deus e gazeg ha dour a vo skuilhet c'hoazh gant hon gourglazarded.

Gant al lennerien

UR RUMM PENNADOÙ ALL WAR AR YEZH

**Respont a ran amañ d'ho
meil diwezhañ, digarez din
war un dro da reiñ ma soñj
war pennadoù zo a zo deuet
er-maez war YA.**

Diwar-benn ar c'hovid19, on bet intereset-kenañ gant ur pennad savet gant Paol Mingant diwar-benn ar c'hwezell (suet, Schweiß, sweating sickness ma klaskit e yezhoù all) he doa skoet Bro-Saoz hag an Alamagn etre 1485 ha 1550. Gant sikour Wikipedia 'm eus gallet mont donoc'h ha kaout a bep sort titour war ar c'hleñved-se, a oa bet kalz gwashoc'h evit ar c'hovid19 c'hoazh.

Ur pennad talvoudus all zo bet ivez, atav war ar c'hovid19 ha sinet JY Perrot, hag a ziskoueze e heulie an niver a dud bet klañv gant ur c'hleñved-red ur fonksion lojistik, dre vras, hag an oberour a lakae war-wel ar problemoù a c'helle sevel diwar se.

E-kichen se, e oa war Ya! 791 ur pennad gant Gege Gwenn a vije gwelloc'h ankouaat buan.

Lennet 'm boa daou bennad gant Cyril Bernard, ha lennet 'm eus ar sizhun paseet an

interview a ziskouez un den en deus kemeret amzer d'en em soñjal ha da gritikañ ar mod ma vez treuskaset ar brezhoneg dre ar skolioù ; un emzalc'h a seurt-se a vank alies, a gav din, d'an emsaverien a lenner o soñjoù er bajenn 12.

Ha trugarez da Ya!, o ya, mil drugarezevitbezañembannet an danevell Channig Gamm, gant Jean-Louis Busson, ar fromusañ ha kaerañ istor am eus bet lennet biskoazh e brezhoneg. Broudit Jean-Louis da skrivañ, da'm soñj eo ar gwellañ skrivagner brezhoneg, gant ur yezh bev ha yac'h ha pinvidik, en deiz a hiziv.

Evit un heuliad pennadoù nevez evel ma kinnigit din ober, emañ e-soñj pouezañ kalz muioc'h c'hoazh war al levezon en deus ar galleg war ar re a skriv e brezhoneg. Arabat deomp bezañ dall pe serriñ hon daoulagad, 90 % eus ar skrivagnerien vrezhoneg a vremañ zo bet savet e galleg, ha raloc'h-ralañ eo an dud o deus soñj bezañ bet savet en un endro hollvrezhoneg pe dost. Evit ar re-se, kenlabourerien YA

hag all, e savin pennadoù en ur ziskouez pesort fazioù stilistik, ha neket yezhadur hepken, a gaver en o skridoù, a glever er radioioù, gant ar fiziañs (diboell?) e vin lennet gant hini pe hini anezhe, hag e vo dalc'het kont marteze eus ar pezh am bo skrivet.

Klask a rin neuze ober ul liamm anatoc'h etre ar brezhoneg evel ma eo bet skrivet ha kelennet hag ar yezh a zo bev c'hoazh e-touez an dud, lakaomp an dud en oajoù din. Ne c'hellin ket pourchas danvez en un doare ingal, a-gaozenn da'm yec'hed, mes klask a rin ober eus ma gwellañ.

Nevez zo ez eus bet embannet war meur a gazetenn ul lizher digor hag a gadarnae ar gwir da vrasfemiñ e Bro C'hall. En emsav brezhoneg e kaver ivez traoù "sagr" betek re ha blasfemiñ zo da gentañ kaout disfiz diouzh an traoù sakr ha diskouez an disfiz-se er c'homzoù hag er skridoù. Evidon, blasfemiñ n'eo ket ur pec'hed ha n'eo ket bet morse, ha meur a wech er pennadoù a zeu ne c'hellin ket miret.

Yann Gerven

FURLUKIN E BREZHONEG

Aozet gant strollad La Obra ha kinniget gant Tifenn Linéatte evit dizoleiñ petra eo bezañ furlukin a-drugarez da bleustradennoù a-stroll. N'eo ket deus ar furlukin bu-bugel a vo kaoz amañ met c'hoarzhet e vo memestra !

D'ar sadorn 24 a viz Here eus 2e da 6e abardaez ha d'ar sul 25 eus 10e30 mintin da 5e abardaez.

Muioc'h a ditouroù : laobrateatral@gmail.com




BOULOÑJEREZH

Un atelier "Fardañ Kouign Amann" a ginnig Ti ar Vro deoc'h. Hennezh a vo kaset e brezhoneg gant Alain Gueguen mestr gwasteller er boloñjerezh tiegezh "Pains & Kouign" e Kemper. Un digarez a-feson da anavezout ar sekred a-gozh ret eus ar wastell arouez-se, diouzh mod ar vro gant amann hag all !

Eus Douarnenez e teu an doare gwastell-se, aozet eo diwar toaz bara amanennet ha sukret fonnus, pleget goude-se evel mod un toaz

feuilhennek. A-hed an atelier e vo fardet ar rekipe mil vrudet-se da gas an oberenn d'ar gêr da heul evit kemer plijadur ouzh he blaz.

Dav eo mirout e blas : Ti ar Vro Kemper : 06 80 63 65 08 / clélia@tiarvro-kemper.bzh



SOUEZHET ON BET...

Souezhet on bet un tamm o lenn ar pennad skrivet gant Maxime Touze diwar-benn skritelloù bet krouet nevez zo gant Alain Le Quernec evit koulzad-emezelañ an UDB. Ha war ar memes amzer on bet kaset en-dro etrezek ma yaouankiz...

N'eo ket ar wezh kentañ d'un arzour labourat evit an UDB, hag un bern a zo bet graet gant un arzour all emañ o soñjal deus outañ - Jean-Claude Faujour an hini eo.

Jean-Claude a oa, er bloavezhioù etre 1974 ha 1982, ezel eus ar strollad ha labourat a rae er skipailh a oa oc'h ober war-dro kemenn an UDB : pevar den, pemp a-wechoù, o krouiñ asambles skritelloù evit lakaat war-

wel soñjoù ar strollad, soñjoù nevez, diaraoger, evit ar mare-se. Miliadoù a skritelloù, tost 100 000 etre tout e-pad ar prantad.

Un dresadenn gant Jean-Claude, implijet hiriv-an-deiz




gant ar strollad, mil anavezet gant ar re a zo intereset gant an dachenn-se, a zo deuet da vezañ ur seurt arouez evit an UDB. An evn an hini eo, a zo bet krouet gantañ e 1979 evit "Gouel Pobl Vreizh", lakaet war skritelloù a bep seurt ar-lerc'h ar mare-se hag implijet c'hoazh e-barzh ar gazetenn "Le Peuple Breton". Graet kozh eskern ganin dindan an taol-se !...

Evit ar re a zo o chom tro-dro Pariz, pe ar re o do tro da dremen dre ar c'hornbro-se : un diskouezadeg eus oberennoù Jean-Claude Faujour a c'hell bezañ gwelet e Creteil (94) betek fin miz Du 2020.

Yvonne Ollivier

Gant Drig

GOUELIOÙ MOD NEVEZ



STUMMADUR MILTAMM

**Ma fell deoc'h en em
stummañ war an danvez
brezhoneg ha bugaligoù
e vo kinniget un devezh
stummañ gant Virginie
Pronost.**

geriaoueg ar pemdez evit ar bugaligoù e brezhoneg" (stummadur bet krouet e framm ar gevredigezh DIVSKOUARN).

An emgav o tont : d'ar Merc'her 9 a viz Kerzu e Ti ar Vro Kemper (3 Plasenn

Familh Gabai, 29000 Kemper)

Enskrivadurioù : virginie.pronost.miltamm@gmail.com - 07.86.78.87.96



Ya !, Sizhunieg
Journal hebdomadaire N° 800
du Vendredi 09 octobre 2020
2 € an niverenn / le n°
66 € ar bloaz / l'année
N° CPPAP : 0622 C 86790
Embannet gant / édité par :
Keit Vimp Bev, 29520 LAZ
02 98 26 87 12
Rener embann / Dir. publication :
Y-F. Jacq, yf.kvb@orange.fr
Kenurzhier / Coordinateur :
Y-F. Jacq, yf.kvb@orange.fr

Maketenniñ / Mise en page :
N. Gourvenec, nicolas.kvb@orange.fr
Koumanantou / Abonnements :
M. Gallais, keit-vimp-bev@wanadoo.fr
Moulet gant / Impression :
Le Télégramme, 7 voie d'Accès
au Port, BP 67243 - 29672
MONTROULEZ/MORLAIX Cedex
Ar pennadoù sinet ne engouestlont
nemet kiriegezh ar re o deus o
skrivet.

ETRE TUD AR GOURENEZ

Produerien a zo er gourenez. Pratiikoù ivez. E fin 2019 zo bet lod eus ar re-mañ oc'h en em vodañ hag oc'h ijinañ gwerzhañ produioù diazez d'ar priz dereatañ, en ul lec'h digor d'an holl. Gouda ar c'hufunañ o deus roet ul lañs nevez d'o raktres ha diskleriet o c'hevredigezh, Kofata, d'ar 14 a viz Eost diwezhañ.

Un dornadig e oant en derou, 'kosteiz Morgad. E miz Genver e tegemerent un 50 den bennak en o emvod kelaouiñ. Goude ar c'hufunañ o deus adkroget ganti e miz Even. E-pad an hañv zo bet nebeutoc'h a vuhez ganto dre ma oa aet pep hini

eus e du. Hag adloc'het eo bremañ. Da geñver foar ar c'hevredigezhioù bet dalc'het nevez zo o deus gwelet 45 den o tont daveto. Un 60 bennak int bremañ.

Hepdale

Ur plas o deus kavet e Kaozon evit derc'hel o stal. "Evel-se ne vo ket dav d'ar broduerien ober war-dro ar gwerzh. Bez' e c'hellintplediñ gant ar produiñ." eme Vincent Crouillère, prezidant ar gevredigezh. Aet e darempredet gant ar framm "Epi", 50 stal e Bro-C'hall a-bezh, 40 da zont. An hini nemetañ e Breizh e vo. Goulennet e vez gant an izili kargañ o c'hont en avañs, bep

miz da skouer. Ha, gant an arc'hant fresk-se, e c'hellont prenañ pourvezioù a gavo sav goude, dafar ispisiri pe boued sec'h.

"Ouzhpenn-se e vimp sikouret, digoust, gant ur poellad a esaeo deomp ar merañ, ar gontouriezh, an teñzorerezh... Met emren e vimp, memestra." eme c'hoazh Vincent Crouillère. E fin miz Here e vo dalc'het ar c'hentañ abadenn dasparzhañ danvez.

Dispign nebeutoc'h

Gant ar soñj krennañ war an dispignoù mont-ha-dont eo bet savet ar raktres. D'ar broduerien d'ober an nebeutañ a hent. Met ivez d'arvezeerien.



Ha d'ar produioù. Ne vo ket plas amañ evit tomatez gounezet en estrenvro, na traoù a seurt-se. "Kinnig ar produioù diazez a c'heller kaout ezhomm outo er mont-en-dro pemdeziek eo ar pal." emezañ.

Etre 30 ha 75 vloaz eo an izili. Goulennet e vez diganto reiñ eus o amzer – div eurvezh ar miz – evit asuriñ ar mont-en-dro. Kement-mañ a sikour da gaout prizioù izeloc'h hag a zo, ivez, un arguzenn ouzhpenn.

RENABLIÑ EVIT ANAVEZOUT GWELLOC'H

E miz Genver 2019 e emezelle Maryvonne Cotten en LPO. Buan-tre goude e voe roet lañs d'ur strollad arbennik, gouestlet d'ar gwennili ha d'ar glaouered, ennañ bremañ un 30 ezel bennak, gant ar soñj



renabliñ an neizhioù ha, dre se, gwareziñ al laboused.

A-viskoazh he deus bevet-hi en un endro e-lec'h ma oa stank ar gwennili. Hag o welet penaos e vez nebeutoc'h-nebeutañ al laboused a seurt-se zo deuet en he soñj saveteiñ anezho. Ha kroget he deus gant renabliñ an neizhioù. "N'eo ket emskiant an dud ha dav eo kelaouiñ anezho. Bep bloaz, goude ma teuont en-dro eus o beaj vras, e adkav ar gwennili o neizh. Re wan int, goude bezañ bet graet meur a vil kilometr, evit sevel un neizh all p'en em gavont." emezi.

War zigresk

A bep seurt gwennili a zo, hervez ma kaver anezho war an aod, e kêr pe war ar maez. Met bez' o deus, memestra, perzhioù boutin. Abaoe 1989 e vez kontet 42 % nebeutoc'h

a wennili siminal (gwennili "rustique" a vez graet outo ivez) ha 39 % nebeutoc'h a wennili prenestr, ar re a gaver e kêr, tro-dro d'ar prenistri. Kerkent ha ma vez freskoc'h an amzer, ha nebeutoc'h a amprevaned da zebriñ en em vodont, dre 100-150 evit mont kuit war-zu Afrika, izeloc'h eget ar Sahara, evit 6000-7000 kilometr, a reont dindan un nebeud devezhioù, o chom a sav, amzer kreñvaat en-dro.

"Skuizhus eo evito. 300 kilometr int gouest d'ober dindan un devezh. Diaes eo gouzout resisoc'h rak ne heuliont ket, dre ret, ar memes hent ha ne gavont atav, goudor er memes plas. Re Bro-Saoz, da skouer, a ziskenn izeloc'h c'hoazh." a zispieg-hi. Ar re vihan a ya kuit abretoc'h, e fin miz Eost, ar re all e miz Gwengolo-Here. Hag an holl da zistreiñ da vare an amzer vras.

Renabliñ

Abaoe ma zo eus ar strollad zo bet graet emvodoù, e Kastellin da skouer, e miz C'hwevrer. Unan a vo e fin miz Here e Karaez. E miz Ebrel zo bet kelaouet 280 ti-kêr e Penn-ar-Bed. Diaes eo bet ober tra e-pad ar c'hufunañ met abaoe eo bet ar strollad oberiant-tre. 1200 neizh a zo bet renabliet – annezet pe get –, e Bro-Gerne dreist-holl, ar braz outo, ur mil bennak, savet gant gwennili prenestr. "Ar re aesañ deomp evezhiañ rak e kêr emaint o chom, war wel d'an holl. Padal n'eo ket posupl deomp heuliañ kement gwennilienn ar maezioù dre ma kavont bod e ti an dud, er savadurioù, e-lec'h na c'hellomp ket mont."

Ar glaouer ivez

Daoust ma vez kaoz aliesoc'h eus gwennili e vez pleustret

ivez gant ar strollad war ar glaouer du. Damheñvel e seblant bezañ al labous-se zoken ma n'eo ket heñvel, tamm ebet, evit arbennigourien. N'eo ket eus ar memes familh, n'en deus ket ar memes liv – du eo-eñ penn da benn pa vez ar re all gant gwenn, arwenn, pe ruz zoken –, ne zoz vont ket kement a vioù, n'en deus ket pavioù ken diorroet. "Abalamour da se e vez ingal o nijal. Betek kousket en ur nijal. Ha sevel a ra neizhioù war an uhel, 4 metr pe ouzhpenn, – pa vez nemet 2,5 evit ar gwennili – evit ma c'hellfe dispakañ e askilli" a zispieg Maryvonne Cotten.

Ha pa vefent disheñvel eo mennet Maryvonne Cotten hag he strollad da zifenn anezho holl, pe e vefent gwennili pe c'hlaouered.

gwennili.29bzh@gmail.com

Plant gant Joseph Tanguy

FAOU-PUT

Anv gallek : Charme commun, Charme faux-bouleau

Anv latin : *Carpinus betulus*

Uhelder : 20-25 m

Bleuniou : Glaswer-damvelen eo ar bisigoù. Hir hag a-istribilh eo ar re bar pa 'z eo dispis ar re parez, e mizioù Ebrel ha Mae, er memes koulz ha ma tispak an delioù. Melus int.

Perzhioù : Gwez bodennek a stummont, roudennek, lufr ha louet o rusk, a c'hell bevañ betek 100 vloaz. Distank int er c'hoadoù e-lec'h ma vezont baliret gant an derv an aliesañ. En em ober a reont diouzh un endro razek ha ne brizient ket un douar re drenk. Harpañ a reont ouzh ar yenijenn kement hag ouzh ar wrez. Ne greskont ket buan, 10 m dindan 20 vloaz. Stoubennek eo ar skourrougoù, un nebeudig.

Stank eo an delioù (ha fetis an disheol dindano) a zo amskouer, pebeilet, hirgelc'hiek, begek, dantek, kleuziek o nervennoù, goeñvidik (an delioù daoust ma teuont da vezañ sec'h en diskar-amzer a chom war ar gwez e-pad ar goañv betek ma tispak ar re nevez). Ar frouezh bodet e blokadoù oc'h istribilhañ a zo darev e fin miz Gwengolo. Ar c'hoad gwenn a zo kalet-kenañ, pounner met bresk ha diaes d'ober gantañ. Harpañ a reont ouzh saotradur ar c'hêrioù.

Implij : Startaus eo ar broustoù hag an delioù. Ar c'hoad o teviñ gorrek ha ingal a zo a-zoare evit ober keuneud ha glaoukoad. Hag ivez toaz-paper, treid evit ostilhoù, pezhioù evit ar c'hoarioù. Livadennus eo ar rusk a ro arlivioù melen. Brudet eo ar girzhier hag ar stummoù mentoniell graet gant ar faou-put, a bleg d'ar benañ.



AN NIVERENN 800, DIJA



"Ul liamm eo evidon gant ar yezh ne glevan ket gwall alies bremañ lec'h m'emaon o chom, Naoned."

Dominique

"Ya !" pour faire entrer encore plus le breton dans notre maison !"

Anne-Pierre

"Un emgav gortozet ganin bep sizhun evit disammañ goude un devezh labour !"

Bleuenn

"Keleier etrebroadel ar yezhoù minorel all eo ar rubrikenn a blij din ar muiañ."

Anaïs

"Dedennus eo ar pennadoù skiantel evit al liseidi !"

Tangi

"Amoureux de ce beau pays, nous ne pouvons pas nous résoudre à voir sa langue disparaître."

Jean-Pierre ha Laetitia

"Nann nann nann d'an amzer diroll, ya ya ya d'ar gazetenn Ya! o keleier ar vro ! o 'brezhoneg 'vevo !"

Rozenn

"Aesoc'h e kavan lenn eget komz rak muioc'h a amzer a vez."

Danielle

"Gwechall 'veze lennet Buez ar zent en tiegezhioù, bremañ 'vez lennet Ya!"

Dominique

"Moullañ, dalc'her, lenn hag adlenn "Ya!" a vez ret !"

Jean-Yves

"Pa ne vezan ket er staj war ar brezhoneg e lenn Ya ! niverel bep sizhun. Grit evel don 'ta!"

Jean-Claude

"Mat eo ober gant ar brezhoneg, n'eus forzh pelec'h er bed."

Izold

"Pemp bloaz zo e lakaen ar sizhunvezh a-bezh evit lenn Ya! Bremañ on gouest da lenn Ya! dindan div eur."

Marsel

"Ya!, keleier sizhuniek ar vro, fresk, berr hag aes da lenn."

Iwan

"Ra vezo an Nerzh gant skipailh Keit Vimp Bev a-bezh !"

Dark Vador

"An hini n'avantur netra. Na koll na gounit ne ra."

Lukian

"Bourrapl eo ar pennadoù diwar-benn ar plant."

Lomig

"Bep sizhun e c'hellan deskiñ traoù diwar-benn tachennoù disheñvel. Tost ouzh al lennerien eo "Ya !", plijius eo ivez."


Sophie

"Liesseurt eo, gant pennadoù aes ha lod disaesoc'h."

Joel

"Ya!, evit bezañ kelaouet war ar stourmoù !"

Divi



TRUGAREZ DEOC'H HOLL!



WWW.KEIT-VIMP-BEV.COM

STUMM PAPER

6€

AR MIZ
DRE
DREUZVANKAÑ

80

AR BLOAZ
DRE
CHEKENN

40

AR BLOAZ
tud dilabour, -26 vloaz,
skolidi ar c'hentelioù noz

STUMM NIVEREL

2,5

AR MIZ
DRE
DREUZVANKAÑ